

Redek a ran !

Poz 1 :

Lakaet 'm eus ma boutoù gant ma bizied o krenañ
Mall warnon dougen an test ha redek o kanañ

Bourbouilhat 'ra an dud, dirollet emamp holl
Tostaat 'ra an eur, 'z eus ket amzer da goll

Pre Cho 1 :

Emañ o tont va chupenn ruz klevet a ran ar sonerezh
Setu erru ar c'hamioun paket on en heuliadeg !

Poz 2 :

Unan en va c'hichen a zo deut war gador-ruilh
Pep hini gant e zoare da dreuzkas ar brezhoneg

Met berr eo deut va alan poent eo din chom a-sav
Da gemer ur verenn-vihan ha da evañ

Pre Cho 2 :

Darvoudoù e-leiz a vez aozet a-hed hent ar Redadeg
Mersi d'an holl dud a youl vad ! Startijenn 'zo gant ar Vreizhiz!

Diskan : Redek a ran e brezhoneg gant va mignoned
 Redek a rin gant va yezh hag ar Redadeg

Poz 3 :

Loc'hañ eus Kemper tremen dre ar 5 departamant
Er ribinoù e-kreiz an noz, chom a-sav er fest-noz

Leuniet vo ar straedoù gant tud-kozh ha bugale
An holl remziadoù o treuskas hor yezh karet

Pre Cho 3 :

Freuz ha reuz 'vo e Plougerne 'n em gavet eo ar Redadeg
War-lerc'h 1800 kilometrad krogomp 'barzh ar sonadeg.

Diskan *2